

*YF\_0103\_An Doganed*

Naonteg dogan ha pevar ugent,  
O kamaraded, ma mignoned,  
Kamaraded ha mignoned ni a vo bepred,  
Naonteg dogan ha pevar ugent  
Zo em rankontret n'ur c'hroaz-hent.

Ha lavare an eil d'egile:  
"Te a zo dogan, me a zo ived."

Triwec'h gwalennad lien moan  
Ac'h a d'ober boned d'un dogan.

Ha c'hoazh a lavar an dogan kaezh,  
E voned na 'n eo ket graet aes.

E voned na 'n eo ket graet aes,  
E gorn bras a chom c'hoazh er-maez.

Ma gwreg Lena a zo ken koant,  
A c'hounez din-me kalz arc'hant.

Ur skoed bemdez ha, daou d'ar sul,  
A rafe eizh skoed e-pad ar sizhun.

Gwechall, araog ma oan dogan,  
Me 'n boa tamm bara ebed d'am c'hoan.

Breman me m'eus ha rouz ha gwenn,  
Ha dougen kerniel war ma 'fenn.

M'am bet en alies a vuoc'h laezh  
Hag a dogan a zo war ar maez.

Me roje krampouezh ha laezh tro  
D'an holl dogan a zo tro-war-dro.

Quatre vingt dix-neuf cocus,  
O camarades, mes amis,  
Camarades et amis, nous le seront toujours,  
Quatre vingt dix-neuf cocus  
Se sont rencontrés à un carrefour.

et se disait l'un à l'autre:  
"Tu es cocu, je le suis aussi."

Dix huit aunes de toile fine,  
pour faire le bonnet d'un cocu.

et encore il dit, le pauvre cocu,  
Que son bonnet n'est pas commode.

Que son bonnet n'est pas commode,  
Que sa grande corne reste encore dehors.

Ma femme Lena est si jolie,  
Qu'elle me gagne beaucoup d'argent.

Un écu par jour et deux le dimanche,  
Ce qui fait huit écus pendant la semaine.

Autrefois avant que je fusse cocu,  
Je n'avais pas un morceau de pain à mon souper.

Maintenant, j'en ai, et de roux et de blanc,  
Et je porte les cornes sur la tête.

Si j'avais autant de vaches à lait  
Qu'il y a de cocus de part le monde.

Je donnerais des crêpes et du lait caillé  
A tout ce qu'il y a de cocus aux alentours.